

KANTIK SANT GWENNOLE

Diskan : O Pastor mat, Sant Gwennole
 Klevit pedenn ho pugale ;
 Diwar ho tron er Baradoz
 Skuilhit warnomp gliz ho pennoz.

- | | | |
|---|---|--|
| 1. Sant Gwennole a zo ganet
Euz a lignez ar Rouaned
Fragan e dad, eun den a feiz
A oa kenderv da roue Breiz. | 3. E lec'h m'ema Landevenneg
Eul lec'h didrouz ha gwezennek
Eun d'eus savet eun abati
Da bedi Doue, d'e veuli. | 5. Landrevarezec ho kar ato
Ha d'ho karout a gendalc'ho
O ! ni o ped Sant Gwennole
Mirit hor c'horf hag hon ene |
| 2. Met Gwennole, abred abred
A zisprigas madou ar bed
Ha ser pedi hag aspedi
E c'hellas mont d'eun abati. | 4. Aman gwechall e tigasas
Daou vanac'h fur ha desket bras
Evit kroui ar barrez-man
Kanom eta bennoz d'ezan. | 6. Betek mervel ni a stourmo
Gant ho sikour ni a drec'ho
Hag eun devez en ho kichen
Ni vo eürus da virviken. |

KANTIK ITROUN VARIA QUILINEN

Diskan : O Gwerc'hez Itroun Quilinen
 Setu deuet ho pugale
 Da bedi dirak ho skeudenn
 O selaouit heb dale.

- | | |
|---|--|
| 1. C'houi a zo eur Vamm galloudus
Ni ato prest da goueza
Hor buhez a zo hirvoudus
Deuit buhan d'hor skoazella. | 3. Galvet hed an eternite
Da veza Mamm da Jezuz
Evidomp-ni bezit ive
Eur vamm vad ha truezuz. |
| 2. Pec'herien skuiz oc'h hirvoudi
Dindan skilf an drouk spered
Galvit prim ar Werc'hez Vari
Ha ganti c'houi vo salvet. | 4. Da virviken er Baradoz
Gant kalon ni a gano
Meuleudi-ha mil gwech bennoz
Da Vari ha d'he hano. |

